

*YF\_0142\_Son ar pilhaouer*

Marivonik zo dimezet  
gand eur flaerius pilhaouer (diw wech)  
E Lokefret ez eo ganet,  
E koumanant Toul al Laer

*Diskan*

Foei, foei, foei, ma zammig aotrou,  
Gand e stoup hag e bilhou

Kerken an Melus sonet  
E kleier bras ar Fouilhez  
Ma lapousig prira dihunet  
Sav er mez deus e gwele.

Drailhañ ra eun hanter bater  
Tanañ a ra e gorn-butun  
Kemer a ra e grog pouezher  
Evit mont war hent Sizun

P'en deus kavet kamaraded  
E-barz eun tavarn bennag  
Meur a vanne en deus evet  
Evit lakaat e gof distag

Seul ma z'aio d'ar pardonioù  
E vez atao mezh dall  
Darb'oa dezhan koll e vragou  
E Lokefret an deiz all

Pa deuio karrig an Ankou  
D'ober eun dro d'er vro-mañ  
Me yelo da laret dezañ  
Kas ma 'filhaouer gantañ

Komzet vo d'an aotrou person  
Deus ar flaerius pilhaouer  
'Vit ma kano al Libera  
Hag ouzhpenn son al lonker.

Marivonne est mariée  
avec un chiffonnier puant (bis)  
Il est né à Loqueffret,  
dans la ferme du Trou du Voleur

*Refrain*

Foei, foei, foei, mon petit monsieur, avec  
son étoupe et ses chiffons

Aussitôt l'Angelus sonné  
Par les grandes cloches de La Feuillée  
Mon oiseau se réveille vite  
Et sort du lit.

Il bredouille un demi-pater  
Il allume sa pipe  
Prend son croc à peser  
Pour aller sur la route de Sizun

Quand il a trouvé des amis  
Dans une auberge quelconque  
Il boit de nombreux coups  
A s'en éclater le ventre

Quand il va dans les pardons  
Il est toujours complètement ivre  
E a failli perdre son pantalon  
L'autre jour à Loqueff~et

Quand viendra la charrette de l'Ankou  
Faire un tour dans ce pays  
J'irai lui dire  
D'emmener le chiffonnier avec lui

On parlera au curé  
Du chiffonnier puant  
Pour qu'il chante le Libera  
Et en plus la chanson de l'ivrogne.